

# KANTIK

## PARDONERIEN KALON JESUZ.

War ann ton : *Pitié, mon Dieu !*

Ho pet truez ! — va Doue, hor selaouet  
Evit hor bro beuzet enn he daelou ;  
Toullet he fenn hag he divrec'h chadennet  
He daoulagad a dro ouz ann envou.

DISKAN.

O kalon Jezuz !  
Kalon dibab !  
Bezit, bezit truezuz  
Ouz hor bro hag ar Pab !

Ho pet truez ! va Doue, war eur C'halvar  
Ni wel Pi Nao, reneur braz ann iliz ;  
Seul was he boan, seul startoc'h ni a lavar :  
Bebet Pi Nao ! ha fin d'he boaniou kriz !

Ho pet truez ! — va Doue, pa deu Mari,  
Mari ho mamm d'hor bro d'en em ziskouez,  
El leac'h ne deuz nemet lann ha gwezeri,  
Bleuniou ann Env a zavo a nevez.

Ho pet truez, va Doue, ouz dallentez  
Kement a bec'h, hep sonjal e reont fall !  
D'ezho, hirio, sklerijen ha karantez !  
Karantez vraz ! ma vint kristenien all.

Ho pet truez ! — va Doue, gant ho kalon  
C'hui glevo mad goulennoù hon hini ;  
Pa roit ho koad, bemdez, er gommunion,  
Petra peffe da nac'h mui ouz omp-ni ?

Ho pet truez ! — Ho kalon, o va Doue,  
A ziskouejot da zantez Mac'harit ;  
Na feunteun all n'euz bet kavet abaoe  
Ken puill he gras d'ann dad keiz a garit.

Ho pet truez ! — va Doue, c'hui lavare :  
Pa falvezo da rouantelez Frans  
Beva e peoc'h, beva skeduz adarre,  
Ne glasko ken feunteun a bareans.

Ho pet truez ! — va Doue, gant he sec'het  
Ouz ho kalon hor bro baour a dosta ;  
D'ar glanvourez skuillit ann dour a iec'het  
Ha pareet ann ene da genta !

Ho pet truez ! — va Doue, ho pet truez !  
C'hui oar ervad ez omp ho pugale !  
Ouz hoc'h e sent ar maro hag ar vuez,  
Hor sikourit, va Jezuz, hep dale !

---

## KANTIK AR PAB.

---

Var don : *Ni ho salud, Rouanez an Ælez.*

O Tad Santel, ni fell d'omp oll plega,  
Dindan ho torn savet d'hor binniga :  
Ni roio d'ehoc'h, evit harpa ho tron,  
Hon alozen, hor breac'h hag hor c'halon,

Ar Pab, er scol gant ar Speret-Santel,  
A zo e penn an esquibien fidel ;  
Comzou ar Pab a verq ar guir greden,  
Gallout ar Pab a c'houarn pep christen,  
O Tad Santel, etc.

A berz ar Pab, beleien peb parrez  
Euz an envou a zalc'h d'comp an alc'huez ;  
Ha setu stag ar memprou ouz ar penn,

Ha gret eur c'horf euz an oll bopl christea.  
O Tad Santel, etc.

Euz a viscoaz, hag en amzer da zont,  
Euz an Iliz ar Pab eo ar men font ;  
Rac-se Simon, Men zo bet lezhanvet :  
Var ar men-ze an Iliz zo savet.

O Tad Santel, etc.

Gouzout a reomp, ni tud divar ar mez,  
Var ar men font e saver an tyez :  
Ty var an trez a zo buhan squbet  
Gant an arneu hag an avel follet.

O Tad Santel, etc.

Ar Pab, ar Pab, euz an Iliz ar penn,  
Zo evidomp ar c'hef euz ar vezen ;  
Mar fell d'comp-ni e ve glaz an deliou,  
Dalc'homp d'ar branq, d'ar c'hef ha da griziou.

O Tad Santel, etc.

Eul lestr, var vor a renq caout eur sturier.  
Hag an Iliz zo fisiet e Sant Per :  
Ha da virout ne vo ar vag beuzet,  
En-hi Jesus gant Per zo azezet,

O Tad Santel, etc.

Ar Pabet oll, an eil goude eguile,  
Ho deuz dale'het ar stur euz ar vag-ze :  
En hon deiziou Pi Navet ar sturier  
A dreuz, sionaz ! meur a var goal amzer.

O Tad Santel, etc.

D'he adversour bepret carantezuz,  
Dre he zousder eo henvel ouz Jesus ;  
He zaoulagad o para var ar groaz,  
E sturi'r vag quer sioul ha biscoaz.

O Tad Santel, etc.

Ha coulsconde e sav ar goagou mor ;  
Enep ar Pab an dud fall e fulor,  
Evit gallout coll ar religion,

A glasq discar hon Tad divar he dron.

O Tad Santel, etc.

Lamet o deuz eul lod euz he stadou

Ho lemel oll a fell d'ho goal ionlou :

C'hoant o defe gant speru he guruna.

Evel he Vestr; gant scarlek he visca.

O Tad Santel, etc.

Gant an avi euz he deir gurunen.

Paotret Satan a iud a bovez ho fen :

« Nan, emezo caout ar Pab da Roue

» Na blijquet d'eomp, ni gar al liberte. »

O Tad Santel, etc.

Ha ni ive a blij d'eomp ar franquiz,

Ni Bretonnet, bugale d'an Iliz :

Rac-ze a die ar Pab beza Roue

Da zere'hel franq plas an Aotrou Doue.

O Tad Santel, etc.

Enep Doue pa stourme tud difeiz,

D'ezo gneich all respounte paotret Breiz :

« Peoc'h, emezo, gant ho lezen neve,

» Ne quet d'eoc'hu da c'houarn hon ene. »

O Tad Santel, etc.

Ni zo enz goad ann dud calounec-ze ;

Evidomp-ni ne quet chenchet Doue :

Ne quet chenchet creden hon tadou coz ;

Per zo bepret porzer ar baradoz.

Tad Santel, etc.

Ni zalé'h eta d'an Iliz, ha d'ar Pab

En hon touez pep mam lavar d'he mab :

« Euz da zivrec'h m'an d-euz ar Pab ezom,

» Que, va buguel, que d'he zifen e Rom. »

O Tad Santel, etc.

---

Kemperle, moulet gant Tn. CLAIRET.